

398

Ar Mezhvier
hac ar Penitant.

(229).

Var an ton gallec .

Ar Penitant.
Piou a gân ger contant ?
Ar Mezhvier.
Piou eo an zarabust-me ?
Ar Penitant.
Ur paour gëz Penitant,
A vouël druz var e vue.....
Ar Mezhvier.
Me vouël nos ha mintin.
Ar Penitant.
Certen te ra errvad .
Ar Mezhvier.
Ja , pa scuill ar giin
Berneus va daoulagad .

Ar Penitant. (230)
Me zisq pedi Doue .
Ar Mezhvier.
Hac me a zisq da eva .
Ar Penitant.
Hac e credes - ta , te
Ouz se tenna lore'h brema !
Ar Mezhvier.
Te a stou o pedi .
Ar Penitant.
Se a dle peb christen .
Ar Mezhvier.
Ha me a stou va fui
Dinday an duelen .
Ar Penitant.
Me vir ar yun benedez .

Ar Mezhvier.
Evelse out drouc - livet .
Ar Penitant. (231)
Te a ev nos ha dez
Memes er c'horaiz bepret .
Ar Mezhvier.
Nemet ur pred ne ran .
Ar Penitant.
Neo nemet da zever .
Ar Mezhvier.
Mintin e commançan ,
Gen na vez mui dez scler .

Ar Penitant.
Na evañ nemet dour .
Ar Mezhvier.
Ar giin a ro ar vue .
Ar Penitant.
Perac , maleürus paour ,
E zout brumet evelse .
Ar Mezhvier.
Ar dour a viein va c'halon .
Ar Penitant. (232)
Neo get quelloc'h ar giin .
Ar Mezhvier.
Foëltr bigen dour poeson
Na dostai diouz va min .
Ar Penitant.
Va goele so calet
Ar Mezhvier.
Va hini so var ar ru .

Ar Penitant.
 Un ene ger dallet
 A dleer sicour diouch-tu.
 Cred din : chench a rue ;
 Bez aoun rac ar maro .

Ar Meznier.
 Penos em spontfe-me,
 Pa ven cousquet fe meo ?

Ar Penitant.
 Te a zivuno c'hoas .

(233) Ar Meznier.
 Ja, mes evit eva .

Ar Penitant.
 Ah ! pez seurt stat, sionas !
 Piou a gredo gement-mâ ?

Ar Meznier.
 Mil meznier evurus .

Ar Penitant.
 Tud fall, eveldout-tê .

Ar Meznier.
 Perac int tamallus,
 Mac'h evont coulz ha me ?

Ar Penitant.
 Me gar ar garventez .

Ar Meznier.
 Ha me a bella outi .

Ar Penitant.
 Te a dec'h alies
 Eus da voueur ar sourci .

(234) Te varvo maleurus .

Ar Meznier.
 Ha te voar an dra-se ?

Me a verzo eurus
 Oc'h eva guin nôs-de .

Ar Penitant.
 Ha pa vi te maro

Ar Meznier.
 Ne meus neb aoun, va mignon .

Ar Penitant.
 Prest casset te verzo
 E fonz ur bez meurbed don .

Ar Meznier.
 Te lavar gasu certen ;
 Me vo casset d'ar c'haos :
 E fonz ur variqen
 Me vo enterret bras .

Ar Penitant.
 Adie, Meznier, adie .

(235) Ar Meznier.
 Adie eta, Hipocrit .

Ar Penitant.
 Te bella ouz Doue

Ar Meznier.
 Ro peoc'h din, ha t'ec'h prest quit.
 Vit petra omp er bed ?

Ar Penitant.
 Evit goumit an êe .

Ar Meznier.
 M'em bo er gounezet,
 Mar bezân m'eo nôs-de .

A. L. M. L.